

D'am e'hevreur J. C. R.

EUR BELEK NEVEZ.

Var don : *Huanaden diveza ar Barz* (Telen Remengol).

Setu te belek, ma mignon :
 Eun Doue mad en deuz da c'halvet :
 Ganed, 'n euz goulet da galoun,
 Da galoun dezhan a c'heuz roet.
 « Divlazel eus traou ar bed-man
 « Setu, emez-hout, en ho kichen,
 « Ho pugel, Jezuz ; a vremen,
 « E z'oun deoc'h : ra vezin da viken.

'N Escob zantel a Zant-Briek,
 Hon Tad ken karet, ken Breizad,
 Pa n'euz groet ac'hanout belek,
 Did' en deuz laret : « Ma bugel mad,
 Bretoun 'out disken en dachen
 Kerz, ha dindan baniell hor Zalver,
 Stourm, stourm beprep hep fallaen,
 Hag heuill, kalounek, da vir Rener.

Kerz, ma mab, lar d'as kenvrois
 'Neo ket ar vuez-man peurbaduz
 Lar de karout holl an Iliz,
 Mar c'hoantaont beza eurüz.
 Uc'hel, e iez koz hon Tado,
 Prezeg hor Zalver d'ar Vretoune ;
 He galoun sakr da gennerzo ;
 Ma bennoz ive a vo ganed !!

Setu te, breman, ma mignon,
 Abostol Jezuz, hag he gannad ;
 Oh ! Te 'vo eur belek guirion.
 Eur belek kalounek, hegarard !!
 Ma bari ! vel eur bod spern-guenn
 E kreiz ar c'hoad-med, er meaziou ;
 Zugernuz 'vel eul lilien
 A gas d'an neac'h c'houez-vad he bleuniou !!

Siouaz ! Kalz a enebourien
 Kalz a dud dianket a gavi !
 Meur a ene klouar ha ien
 Leun a faziou, leun a ziegi !
 Lar de : da Jezuz diredet,
 C'hoant en deuz da rei deoc'h he vennoz ;
 Dira-z-han, azius, daoulinet.
 E-man eu-aoter ouz ho kortoz.

E pep tu 'liez a veli
Klemmoù, huanadou, hag enkreuz,
Emzivaded oc'h hirvoudi,
Meur a baour ezomek, en dilez.
Te, ma breur, vo red did neuze
D'ho dañlou kemmeska da zañlou ;
N'em lakaat a-unan gant 'he
Evit frealzi ho gouliou.

Guelet a ri meur a glanvour,
Spountet rag ho diveza tremen,
O c'houle gan-ed-te zikour,
En ho guele-douar kent disken.
Kerz neuze d'as preudeur nec'het :
Lar de ez 'eo Doue eun tad mad ;
Komz de euz Jezuz dilezet,
En deuz evit-ho skuillet he voa '.

Dired, nij hep doan, d'an emgann ;
Sell, en enuou, kaëra kurunen
A zigouez 'vit poaniou bihan,
Euz peurz Doue, d'he servijerien,
Pa vi mantret gant ar glac'har,
'Nem daol buban e kaloun Jezuz ;
Gra eur zell var menez Kalver,
Hag a savi adarre nerzuz.

'Tresek ar baradoz, hor bro,
Distro, noz, ha deiz, da zaoulagad,
Zent Breiz-Izel da vennigo
Hag a ginnigo d'id da vennad.
Ped stard Mari, hor mamm zantel.
'N 'Introun Varia a Remed-Holl :
Mari a harpo he bugel
Ha birviken na ielo da goll.

Ha, dirak Jezuz pa stoui,
Gra eur beden 'vit Breiz ankeniet,
'Vit 'n 'anaoun a glemm truezuz
Evit da gerent, da vignoued !
Ra zeuio, avechou ive,
D'id menek deuz c'henvroad ker :
Ped stard, ma savo, hep dale,
Ar paour keaz Barz gan-ed d'an aoter.

BARZ KOATMIN.